

YF_0106_Ar plac'h dimezet gant he mamm

Erru eo ar moment, ma merc'hig da zimezin
Gweled breman petra, petra az-peus d'ober,
Doned da zimezin ha dilezel ar ger

Ma mamm na gomzit ket, ez on en oad da zimezin
N'am-eus 'med c'hwezeg vloaz, yaouankig ez on c'hoaz
Doned da zimezin ha dilezel ar ger

Ma merc'h eman red din, araog da guitaad ar bed
Gant aon da c'houde, c'hwi a vezo tromplet
Ha viet malurus keit ma vi war ar bed

viet = vioc'h

Ma mamm c'hwi n'oc'h ket prest, da voned c'hoaz d'am c'huitaad
A-benn eur pennad bloaiou, e vin muioc'h avanset
A-benn eun neubeut amzer ma choaz a vo ganin graet

bloaiou = bloaveziou

Ma merc'h eun den yaouank a zo dimeus ho koulenn
Eun den a galite, hag eun den a zoare
Kemerit anezhan hardi, bara ne vanko ket

Ma mamm e-barzh ho kozni, ne dlean ket ho refusin
Ma ran eur barti fall, ne glemmin birviken
'Med c'hwi ho-po da ziwall goude ma ne men keun

Setu dimezet ar plac'h, ya dimezet gant he mamm
D'an oad a c'hwezek vloaz, doned da ren ar bed,
Siwaz ar paour kez plac'h ne ouie ket petra he-doa graet

Eur pennadig e oant bet o vevan mad asambles
Med an evurusted n'eo ket eun dra badus
Siouaz ar plac'h he-deus bet eun den gwall danjurus

Pa errue d'ar ger, kregin a rae d'ober buhez
Taolet ha distaolet, alies bac'haret,
Setu ar vuhez trist etre an daou bried

Ouspenn e oa didalvez, c'hoaz e oa eur bambocher
An arc'hant bet gonezet, war-dro e-pad ar sizun
Vez debret en eun deiz, ar plac'h a renk chom da yun.

Ar vamm pa he-deus gouveet ar vuhez a oa entrede
Oa 'n em ziskonsolet, o sonjal petra he-doa graet
Malurus he merc'h kaez keit ma vo war ar bed

entrede= etrezo

Me ho ped, tadou, mammou, na rit ket eveldon-me
Na n'it ket da brestin, timin ho pugale,
Ma vez eur barti fall c'hwi ho-pefe keun goude

timin=dimezin

Laoskit ho pugale, o ya na d'ober o choaz
Ha pa vez graet o choaz, hervez o santimant,
Na n'it ket da la'r mann, c'hwi a vezo diflamm.

La'r=lavar